

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

## 74. EN TRE PLOUIDER A TRELEZ

( follennoù 229 - 230 )

En tre Ploueder a tre lez  
Me a meus choazet eur vestres.

Ia ar vrava en eur ger  
Deus a verc'het ploueder.

Me zo eur minor iaouank a zo den a peb affer  
a mar karit va mestres me vezo ho chervicher

Allas non ket kapabl evid ober o chervich  
Mes oui kavo eun all a vezo deus ho tivis.

- Me zo eur minores iaouank a zo meurbet disouten  
Mes oui kavo eun all hag a devezo moeïen.

Neken moeïen a klaskan o kalite va mestres  
Dallout beva en ho c'hrass keit a ma vin he bue.

especial en amzer man sensibl o timiziu  
Balamour dar potret iaouank zo karget a vissou.

Ospen ma c'heont dan ebad da zispign ho madou  
Gant ar gwin a gant an danss ag gant ar c'hoari kartou.

Me a promet dec'h va mestress eur voech ma vezin demeze  
biken gweren na karten em daouarn ne ves goëlet.

Setu an daou man consolet hag hi o taou demezet.

E ben tri de goude se adare ben a neve  
e voa en hostaliri gwin a kartou adare

Setu ar plac'h man dar ger ag hi meurbet disolet :  
Allas me zo bet tromplet he kredi komzou ar goasset.

Gwech all me meus bet amzer em boa eur galon ie  
Ken en ker a var ar mes ag en kement assamble.

Pa erruen en kornik an dans  
Me a vije respectet evel unan deus an noblans.

en eur visach laouen ag eur lagadik parfait  
Kement a c'houaze ouzin a fote din da garet.

Breman zo eun amzer all a zo kontroul dezi  
Kement na chouars ouzin nallan karet hini.

Guech all me meus bet amzer a zouge teñr goalle  
eunan rus eunallik c'hlas ag eunallik velen.

Pa laken va hini rus me voa eur fouldrilizen  
Ken en ker a var ar mes a kement a ve varchen

Pa laken va hini c'hlas me a voa victorianes  
en galon va chervicher evel eur rouanes.

Va ini velen a laken var va bis avichou  
a pa sellen outi e tenen huanadou

O chonjal em iaouankis deus an amser dissoursi.  
Malheur dan hini c'huita pa na zalc'h mad dezi

vvvvvvv

Jannet Puill 19 janv. 1851

-----  
vvvvvvvvvvvv